

GUIR BORTRET AR MERC'HET HAC AR GRAG'EZ.

Var ton Portret an Intanvezet.

Ec'hant c'hoas mar gallàn da o ber ur portret,
Tostait d'am selaou, oll grag'ez ha merc'het ;
Me rayo déch santout ho tefotou antier ,
Laqêt int oll amàn ganén var ar paper.

Aon ameus ho speret volach , odasius ,
Cals re vif , cals re bront , ha cals re golerus .
N'o lèzo qet da zantout pelêc'h ezoc'h dalc'het ;
Pere eo ar viçou en pere oc'h quezet.

Me zo sur ha certen , ma ve c'houi o guelfe ,
Em em goachfac'h buan et c'havernou nos-de ,
Er forestou donna , elêc'h ne za den ebet ,
En mesq al loënet gouez , tigret ba leonet.

Var defotou re-al digor ho taoulagat ,
Var ho re oc'h-unan ezint sur serret mat ;
Me ya d'o dig'eri ha d'ober déch guelet
Petric oc'h pendaben , pa vec'h examinet.

Eus ar grouadurien an nebeuta parfet ,
Vicius en ho corf , frajil en ho speret .
Ecumen an natur , sourcen a valeuriou ,
Plijadur an dud sot a goez en ho lassou .

Adversour ar furnes er mæs couls hac en ti ,
Un dour oll corompet , feunteun al lousson ,
Er bed universel eur monstr eus an natur ,
Un droug so necesser , eur goustus plijadur .

Eur c'hef eus an ifern , en ilis eur zantez ,
Eun æl dre ar ruyou , diaoul en tieg'ez ,
Eur big o ragachat en toul an dorojeu ,

Eur marmous pintet clos var bord ar prênestou.

Eur haro er jardin, adversour d'al louzou,
Mar dit en eur goele. c'houi en ampoeson;
Da antren e matier nemet commanç na ran,
Ret eo din-me prouvi ar pes a avançan.

Guechal en eur sermon Sant Bernard a lare
Gant cals a eloqanç couls a gant guirione,
En devoa ar grag'ez g'inou an drouc-speret,
Ar memes tra i've a lar eus ar merc'het.

Er Genes. chabist tri, e commanças Eva
Da zebri'n tam aval. da bec'hi da g'enta;
Hi e deus or c'hollet, hi so cos d'hor maro
Temporel hac eternel, ha d'bon oll maleuriou.

Goell ê bez'en dezert etouez an oll loënet,
Pe er vroyou sovach emesq ar barbaret,
Evit chom ea un ti gant eur vreg e coler,
N'en deus netra quer goas er hed oll en antier.

Ar merc'het, ar grag'ez a so oll traou dister,
Envel eus Tisifon Alecto ha Mejer,
O c'halon, o zellou, so evel roejou,
Hac o daouarn goude evel eul liamou.

Piou benac a c'houlen plijout da un Doue,
Gant soign ha dilijanç a bellai dioute;
Ar pec'het maleurus d'o c'havet a deuyo,
A goezo ep dale, siouas, en o laçou.

Clèvit Sant Augustin o comz eus aneze,
Docteur bras en ilis hac o anaveze;
Pebes objet dister ar vreg evit un ozac'h!
Assur gant guirione re alle qet e nac'h.

Ouspen in carg'et c'hoas a infidelite,
Eus a ambision hac a impurete:
Eus a ingrateri e qever peb-unan,
A orgouil, na estim nemett-y e-unan.

Ar profet qès Jonas , gant eur balen longet ,
 En e gof pad tri de a oue guel preservet
 Eg'et ma oue Samson e conta e secret
 Da Dalila e vreg pa oue quer trahiset.

Sant Yan ar Badezour a oa bet respectet
 En desertjou goechal , memes gant an tigret ,
 An oll loenet goez a deue d'e cherissa ,
 Biscoas ini anê na eure droug deza.

Mes pez sort differanç dirac Herodias !
 Goude beza danset , an draïtoures , siouas ,
 Roet e voe dezi ar pez a garje da choas ,
 Sant Yan voa ar victim , e benn a c'houleñnas .

G'hoas Sant Yan Chrisostom bars er chabist novet
 Demeus a Zant Vaze , a deu da lavaret :
 Ar plac'h en guirione a so dor an ifern ,
 Hent an iniqite , daonet qig bac esqern .

Gouli ur scorpion , da beini neus qet
 Er bed universel cavet dezan remet ;
 Un droug zo goel noazus ha domajus dre oll .
 Tol plêt partout raze , n'ouffent nemet da goll .

Selaouit Sant Gregor e pozi e gomzou ,
 Laquit evez oute , evit m'oc'h instruo ;
 Ar plac'h e deus , emezan , oll belim eun aspic ,
 Teod serpent ha toussec , daoulagat bazilic .

Finesse an dragon , al loënet danjerus ,
 Ha c'hoas eur plac'h a so cals muioc'h maleurus ,
 Ne deus ezel abet na el rei ar maro ,
 Ne vo lazet ganti nemet neb a fio .

Consultomp Orijen var bue ar merc'het ,
 Petra laro demp-ni ? o deus qenta pec'het ,
 Ez int ar monstr Satan e deus or chasseet
 Demeus ar barados , elêc'h ma voemp crouet .

En ur g'ir , ar merc'het e deus an oll viçou ,

Bulumus maleurus demeus hon oll finiou;
 Int o deus da g'enta transgresset al lezen,
 Trompet hon Tad qenta ebars jardin Eden.

Brassa malis an den, mar be comparachet,
 Ha laqet er valans, evit beza poezet
 Gant œuvrou mad eur plac'h memeus e œuvrou goella,
 N'en din qet quer bras drouc a ma è ar rema.

Mar selaouan Caton, a deu din da laret
 Ar furnez, ar r̄eson n'en din qet d'ar plac'het;
 N'ellont o fosseidi james en o c'halon,
 Ha pa n'en dint netra nemert ambision.

Sant Jerom a lavar : eur vreg vad er bed-man
 Zo evel ur Fenix nen deus qet nemetan ;
 Hac eur vreg vad ive, mar be cavet ini,
 Me so sur er bed oll, ne vezoz nemeti.

Tertulien goechal, den habil ha savant,
 O comz eus ar merc'het, a lavar exselant,
 O deus ar gassoni demeus an diaoulou ,
 O malis, o bulum hac o goel-oberiou.

N'en dint serten netra mar bent comparachet
 Gant malis ar grag'e bac ini ar merc'het ;
 Rac an diaoul a noas dreizan e-unan,
 Hac ar merc'het er gra dre buissans Satan.

Ne lavaran netra na hal an oll da c'hout ,
 N'en deus netra ebet na laqin da dalvout;
 An douar, an ifern , ar bed oll, o armou ,
 O malis o-unan birviqen ne vanqo.

An Ecclasiastiq a lar hac a assur ,
 Var cant den so cavet un den mat, un den fur ,
 Mes etoies mil ha mil demeus an oll merc'het
 Biscoas ini er bed ne zeus gallet cavet.

An den fur ha savant, ar filosof Caton
 A rente gras da Zoue eus a greis e galon :

Dre ma voa bet ganet etoies ar romanet,
Ha nonpas en plas all e creis ar barbaret.

D'an eil, m'oa partajet demeus cals a r̄eson,
Evit gallout servich oll dud e nasion;
D'an drede ma voa bet gr̄et goas ha nonpas plac'h,
Exant eus a valis evel m'ê peb ozac'h.

Pithagoras goechal pa voe interrojet
Perac' roje e verc'h d'un den gantân casset,
A respontas qerqent hep nep difficultie,
N'alle en em venji guelloc'h eus an den-se.

Gout a ouie erfat neus netra qen noazus
Eg'et eur femelen, na qen malicius;
Diaoulou int en ti, un tourmant int ermes,
Ne reont nemet brezel, disput en tieg'ez.

Goas int evit brezel, goas int evit bossen,
Mil maleur er bed-man a occasion o fenn;
Eus oteur ar chanson m'o ped na fachit qet,
N'en deus netra avanset eb beza goarantei.

Fin.

IMPERFECTIONOU AR GRAGEZ.

Var un ton grignous.

Neoun ha me a grete disclêria ar secret
An imperfectionou eus ar femelezet;
Gouscoude pa en sonjan e ran eur goal afer,
Droug gr̄et vo qementman, ne oun petra ober.

Mar em bez eur reprimant, pebeus displijadur!
Dre eur chanç droug avancet, hac un tol dinatur,
Var ar scritur ancien, pini e meus lennet,
E cavan meur a voaram var ar mèmeus sujet.

An eol, tad ar sclêrijen, a zeu d'en em guza,
Al loar eo ar sumelen a zeu da zispaca;

Houma a so imparset, sujet d'ar chanjamant,
Evel ar fumelezet dre ho zamperamant.

Eur galon avarisdet ha penn eur fumelen
A aller comparachi ebars en peb termen;
A viscoas e zint calet, muioc'h evit simant,
A zo cos a vil maleur erru communamant
Eur blijadur dommajabl, hac un droug necesser,
A zo dre ar bed mouvant e lacat ar viser;
An alc'houez, hac ar sourcen a imperfescion,
Hac an doriou an amzer ebars en peb sezou.

Bêleg memes sant Gregor, un den qen eloqant,
E galf ive un aspic ha goal deod eur serpent;
Un dragon dre e fulor pa vez mui animet,
A g'ef so dre e sellou goel vit greg coleret.

Maliç eur vreg a surpas maliç an diaoulou,
A lavar Tertulien ebars er scrituriou;
James ne vanq fumelen, mar bez contrariet,
Da glasq sicour da venji mar g'el eneb sujet.

Me a g'ef eur fumelen, dre e mondanite,
Hanval bras eus ar fleuren eus an antiquite,
Pa erru eur voenanen da bicat e delliou,
En em lez da disipa vel ar simpla louzou.

Ne ouffe biqen eur goaz beza falloc'h partajet
Evit rancontri da bar eur fumelen diboellet;
Cuza ra'n iniqite dindan eur c'hoef mignon,
O c'hortos al liberte da fumi en dragon.

Me ne gavan qet estranch goelet eur fumelen
Ne jener gant netra, tout familier eus peb den,
Mes eur spullen droug placet, var un habit a fent,
E laqaï da c'hognal ba da scrignat e dent.

An oll montagnou tortu, discaret oll a c'hoen,
Hac an henchou sabranus rabotet oll en plen,
An oll deillou parc mill dest fuet betec al loar,

Carillon ur plac'h a dempest a bompe an douar.

Ebars marc'hajou follet ha foariou Cupidon,
E mesq an dud assonet, an Doue forgeron,
A stingn e oll rouejou evit destum e sec'h
Ar re a so re frajil gant ar femelezen.

Selaouit : *Optima Femina rario Phænice*,
A lavar c'hoas Sant Jerom d'ar merc'het ha grag'ez.
Qer rar evel ur Fenix eo ur fumelen vad,
Evel m'en deus remerget en un andret benac.

Bars an naontecvet chabist demeus a Sant Vaze,
C'hoas ur Sant Ian C'hrisostom a gomz eus ar grag'ez,
O henvel dor an diaoul. Ur vreg insuportabl
So evel ur scorpion e pep tra domajabl.

Jonas a voe assuroc'h ebars corf ur balen
Eg'et ne voa bet Samson dirac ur femelen;
Ar prophet a gof ar pesq eb outrach a guita,
Samson a goll e oll nerz en daouarn Dalila.

An tigret, al leonet, ha calz a loenet goe,
A enore sur Sant Ian pa voa var ar bale,
Ha gouscoude e velet penos ur fumelen
E deus an ingrateri d'ober trêc'hi e ben.

Ma velfac'h bisach Cloris, pa ve fachet Colin,
Efot da veza mug'et an dour var e melin,
E sollicito'n ênvou, dre veuyou impuissant,
Da derri ar chadennou a so cos d'e zourmant.

N'en deus daou den demezet nemet daou ze contant:
An de demeus an euret ha de an anterramant;
Car ur c'honirat da garet dre obligasion
A deu prest da enoui en e bossesion.

Deut eo mouez an dorzunel ha ramach ar goucou,
N'en deo qet ret dec'h brêma grillat hoc'h ivinou;
Clasqit ur c'houbl balinou abars ar goan calet,
Ha lest ar merc'hedigou o unan da gousqet.

Bisach ur vreg e coler so evel ur sac'h glaou,
 Sellou du, un tal ridet, ne laran qet a c'haou,
 Evel m'ê selou un ourz surius, transporter;
 Penos e c'halfe ur goaz bea falloc'h partajet.

Pa vo ebars en ilis, vo evel ur zantes.
 Hac un æl dre ar ruyou, diaoul en tieg'ez,
 Ur spartel en ur prenest, ur bicq var an treujou,
 Ha dirac e goaz tiec. goal hir e muzellou.

Clasq a ieont peb ardou da zeboch ar voazet,
 Darn anê dre o moueziou ha darn all o prezeg.
 Alies mouez ar siren en em rent danjerus,
 Dont a ra en un instant un amzer orajus.

Ar vreg, princip ar pec'het, dreizi e leveromp,
 Evel ma eo rapportet verset tri ha tregont.
 Poent e cavan fluissa, amplic em eus comzet,
 Ne larin mui davantach, rac aon na vent sachet.

Gouscoude guel demei evit dont d'ober voaz,
 Car beva var ar gommun a so danjerus bras;
 P'o pezo choazet ur par, dalc'hit fidelite,
 Qercouls etoues ar viser vel er prosperite.

Ma velfac'h an durzunel o tont da gol e far,
 En em lezel da gouea divar beg'ic ar bar,
 O serri e daoulagad eus en em soupira,
 Hac huanad an adieu a deu d'en finissa.

F I N.